



# ITRON-VARIA VIR SIKOUR

---

TON : *Eun Doue a zeu d'ho kervel.*

1. Salud deoc'h, Mari, rouanez  
Euz an env hag an douar,  
Salud deoc'h, Mam a drugarez,  
A greis kalon ni lavar :

## DISKAN :

*Ittron Varia-Vir-Sicour,  
Clevit mouez ho pugale,  
En hor poan hag en hor labour  
Beillit varnomb nôs a dé.*

2. Choaset à bep eternite  
Da veza Mam da Jesus,  
Roet oc'h da Vam d'eomb ive,  
Chui hon rento evurus.
3. Lec'hiou santel a zo merket  
Da enori ar Verc'hez,  
Enô e scuil varnomb bepret  
Tenzoriou e madelez

4. Chapel ar Verc'hez zo brudet  
En Elliant a tro var dro,  
Hon tud koz o deuz e c'haret,  
Ni e c'har ive d'hon tro.
5. Dirag oc'h imaj benniget,  
Guerc'hez, amà ni bedo ;  
Pa vemp tentet pe glac'haret  
Gant fians ni a gano :
6. Ar vamm evi e bugelic,  
Ouzoc'hu, mam hag itron ;  
A en em erbed biryidik,  
Digorit dici ho kalon.
7. Ar soudard o vont d'an arme,  
An dour en e zaoulagad,  
A lavar : ô Mamm a drue,  
Va diouallit er stourmad.
8. Dreist oll, ar priejou kristen,  
Unanet dré 'r garante,  
A c'houlen ne vanko biken  
En ho zi doujans Doue.
9. Evidomb-ni oll, Elliantet,  
A lavar a vouez huel :  
Ken eget mankout d'ho karet  
Ni ve guêl ganeomb mervel.
10. D'an oll, en Elliant, Mam Doue  
Ho c'hoant hirio goulenet,  
Ma savetaimb hon ene  
O kenderc'hel d'ho karet.

IMPRIMATUR :

*Kemper, 3 a viz Even 1931.*

A. COGNEAU, v. g.